

(7)

## Chanson ar Bram.

Var an toy gallec : Si j'en juge d'après mon cœur.

(8)

Tud chanchus, pere ar fortin dal  
 A dromplas gant e vad-ober,  
 E favor eridoc'h a zo fall,  
 Pa lam ar peoc'h eus o qever;  
 Ha c'houi, pere ar amourusted  
 A varn da zeziroud ato,  
 N'o c'heus get eur moment erusted,  
 En daelou, huanadenou. (bis)

Nan, nan, er bed-ma, va mignonet;  
 N'en eus neb plijadur barfet;  
 Ar galon dezirus demp roet,  
 Da verza ebrus na voe grêt:  
 Er sirconstans epgen ec'h eru  
 On eus plijadur, plac'h ha goas,  
 Pa zantomp en hor c'hof o remu,  
 Evel ma losqomp ur bram bras. (bis)

(9)

Ia, bram, me veul da buisans,  
 Falc'h an ancon var va feultrin,  
 Em faouté en despet asistans  
 Eur bèleq hag eur medesin;  
 Eus a oll ziskibien Esculap  
 En ven e c'houlennet arpo;  
 Mes eur bram diganen a echap,  
 Ha gantan e tec'h ar maro. (bis)

Gocachal sonion caer al lyren  
 A ras meuleudi Amphyon;  
 Mestlus an ad-se, grêt da zerpren,  
 Hag en roas ar c'henta ton?

Gement en eus an istor lennet  
 En asuro ganen breman,  
 E voa son caer ar bramou brudet  
 Pel amzer voa gent evitan. (bis)

Ar bramou en eur valans ingal  
 A voar qenderc'hel ar bed oll,  
 Rac bramet a rer en Portugal  
 Evel ma vrumer en Tyrol.  
 En Babel ur Mestr-mad ofanset  
 Dre 'n argarvusa torfejou,  
 En dud a gonfontas ar c'haqet,  
 Mes ne chenchas qet o bramou. (bis) (10)

Ar fleria zo lod an dud mezus,  
 Pere a dle mont a goste;  
 Mes me meus ur sporet gloriüs,  
 Hag a vramo en liberte.  
 Pieu benac, nevezoc'h evidon,  
 Am ampeschfe da remui,  
 Qer courachus evel ur gascon,  
 Me foeltre ur bram eus e fri. (bis)

Tied vras ar bed, tied a gals pouvoar,  
 Diouzoec'h n'em eus neb avi,  
 O c'hingal ezon var an douar,  
 Pa vraman vraman coulz ha c'houi.  
 E vit miret galloud ha madou,  
 Oc'h oll boaniou a vezo ven,  
 Pa yelo diganec'h ar bramou  
 N'o fezo ezom netra gen. (bis)

Un demerzel eus ar re goanta,  
 Carret gant un den direson,  
 Pa voa gant calz a dud o coania,  
 Eur bram a lotcas a brizon;  
 E dous prezant a c'houley excus,  
 Evel tad d'ar bram achapet:  
 Ar plac'h, dre galon anaoudeg'uz  
 Er c'hemer erfin da bried. (bis) (11)

Dre 'n traou ma oll patant e veler  
 Ar pouvoar bras eus ar bramou;  
 Renta 'reont ac'hanomp seder,  
 Ober a reont eureujou.  
 C'hoaz e vo lavarset marteze  
 Eo mezus rimal var ur bram,  
 Evidon da c'houzoud gouscoude,  
 Ne meus qet scrivet tra dign a vlam. (bis)

(12)

Leanezet, ha c'houi, merc'het coant,  
 M'ar deo o scouarn ofanset,  
 Me c'houlen diganec'h: p'o c'heus c'hoant,  
 Na gavit-u qet mad bramed?  
 Ar c'hoarzin vava o t'evuzigou,  
 Sertey a ra din conclui  
 E rid avizjou bramouigou,  
 Qercouls ha ma ra peb hini. (bis)

(12, suite).

D'ar Guin.

Var ton son Joronde.

N'en eus netra ebarz er bed  
 Na rent dide he homach;  
 Memes scorn ar gouan calet,  
 A zo evit da uzach;  
 An douar 'ra, eus da veri,  
 E gloar ar prinsipala;  
 An eol a bar vit da veüri,  
 Me ver evit da eva.

fin.

A. Lédan.